

Deus ar Maleuriou arruet en departamant ar Var

EN DRO DA SANT-ETIENNE

OCCASIONET GANT AN ORACH AR 14 HAC AR 15 A VIS EVEN DERMENET

Jesus, ma Salver adorabl,
Obtenet d'ho pec'her ingrat
Ar sclerijen da disclera
D'ar Vretonet dre ar vro-ma.

Speret-Santel deus en env,
Gret din esplican hep dale
Ar suit dimeus ar maleuriou
Hac an darn deus ar miracloù.

Quement-mâ so bet arruet
En departamant Var hanvet.
Dre deluch dour ha curuno.
Hervez ma rapport ar c'helo.

Ma speret so epouvantel
Ha ma memoar so troublet
O tonet da sonjal esplican
Eur malheur an effroyaplan.

Un ilis hanvet Sant-Germain,
Un templ santel d'ar gristenien
Gant ar c'huruno atlaquet,
Etre ma voat en ofern bred.

Habitantet leis an ilis
A voa o assistan en offic ;
Den neus gallet sortian ;
Oll o deus renquet perissan

An douar a deu da grenan
Hac a ra d'an ilis coean
Var gein quemend a voa enni,
En eur momet, d'ho ecrasin.

O ma Jesus ! tristant malheur !
Dre eur merq dimeus ho couleur
Perisset tud en ofern bred
Heb ma so hini sortiet.

Totaliset gant tud savant,
Var ar bord a pevarzec kant
A voa en ilis binget,
Hac a zo devet ha beuet.

Nebetoc'h evit eur card-heur
Goude ma voa fin d'ar malheur,
En plaç an ilis so cavet
Eur stang hir ha ledan meurbet.

Flotañ ar caeran batimant
So cavet a donder er stang ;
A c'hoas e lavar ar scritur
Ne dap quet ar fonç ar mesur.

Pedomb Doue ar vir galon
Da accordin deze pardon
Ha d'ho taqat oll da repos
Er gloar demeus ar barados.

An outro Richard, deus e di,
Dious e tud o quimiadi,
A guemeras e diare
Da vont da ober eun dro chasse.

Pa voa et dec pas dioute,
E ratorn en dro adare.
Hac a lavar n'eur guir cren
Adieu, ma zad evit biquen.

An itron, o clevet anezan,
A commanças da hirvoudan :
Perac, ma bried, emezi,
E teut cren d'ho abandoni.

Evel ma hantre er c'hoat bras,
An dour varnezan a deuas,
Hac en em retir heb appel
E appu, er span eur roc hel.

Assambles gant an dour couran
E commanç un tan violant,
An tempest hac ar curuno
Quen o souje a voa maro.

Pardon, ma Doue, emezan,
Aman e renquan perissan,
Eb gallout en em repuñ
Ha bean cals a vado din.

En eur sevel var eur garec,
E neus bet apercevet
An tan coet dious an evo
Var e noblañç hac e vado.

O pebes desolation
A entreas en e galon
Guelet consommi e vado
E vreg hac e vugaligo !

An itron, o velet an amzer,
A supplias prest e mevel
Da voned da glasq he bried,
Mar guie pellec'h e voa eet.

Evel ma c'hantre er coat bras,
Souden gantan e erruas,
E appu a span eur roc hel
Hac e disposet da vervel.

Sevet ma mest paour : emezan,
E oc'h var ar poent da berissan,
Gant Doue é eo preserve
Hoc'hoac'hañç hac ho bried.

Respont a eure d e vevel,
E tezel eno da vervel,
Pa ao consommet e vado,
E vreg hac e vugaligo.

Renquout a ra touet dezan
Quen men deus credet anezan,
A voa preservet gant Doue
E bried hac e vugale,

Gant cals a boan hac a courrach
E teujont er mæs ar c'hoat bras
En dour betec o diou gazel,
An otro-man hac e vevel.

An otro so n'em vuestet
Dre eur miracl e vo rentet
E quichen gruo a vezen
Nevoa e tud evit souten.

Pa voa gant e tud o barlant,
E teu var e lerc'h un torant.
Hac a vezena voa ennan
Neus groel dezan perissan.

Chetu i chomet intanves
Ha hi leun a trididigues,
Er vocen gant e zri buguel
Hac i disposet da vervel,

Pa eo bet bolante Doue,
E eo et an dour ac hane,
Hac in sicouret da disquen
Gant Doue hon mest souveren.

C'hoec'h heur ha tregont a amzer
In bet er voezen en mizer
Da soulagin ho c'halono
N'ho doa nemert an delio

Ar mest a commande er fo
An otro Sevenie hano,
A voa atlaquet gant an dour,
Eb gallout dont da n em sicour.

Prozterni a ran dan daolin
Da supplian hon Mest divin,
Mac hon Mam santel ar Verc'hes
Da vezan e avocades

Mar sovetean ma bue,
Ha ma ouvrierien a me,
Me a savo eun ti a c'haeran
Evit ar pevien er vro-man.

E nebetoc'h evit pemp minuta
Eo beuzet e ouvrierien.
Ar forgeo, varc'hadoures,
Tout int perisset assambles,

Henor d'an otro Seveni,
Var an douar ha melodi,
Va pa hei divar ar bed-man,
Ar barados da jouissan.

RECIT

COMPOSET A NEVEZ

VAR UN TOL VAILLANTIS

ERRUET A DOST DA PARIS

AN 3 A VIS MEURS DREMENET

Var eun ton nevez

Me o ped assistantet da clevet recitan
 Ma-unan hon estonet dimeus a guemen-man,
 Ar pez a so arruet var ar c'hopi gallec,
 Mar galian gout ar feçon d'ho zrei en brezonnec.

Mes. quent avanç davantach, e c'houllan sclerijen
 Digant ar Speret-Santel da riman pen-da-ben
 Quement guir a so scrivet var ar c'hopi gallec,
 Ha d'ho esplican facil d'an oll en brezonnec.

Ur vreg yaouanc magneres, o trietrei a Paris,
 Aet e querc hat ur buguel eus a dy ar bourc'his
 Da gass ganti da vagan en toes he bugale,
 Evit zicour o zével ha gonit bara dé.

Dre ur c'hoat a renc tremen o vont da gaout ar guer
 Hac eo bet attaquet, sivouas ! gant ur voler,
 Hac en guisquet en bellec, o ton de bonjouri :
 Ar goad en e goaziet a deu da remui.

« Bonjour, eme an den-man, erru oc'h, ma greg vad,
 — Ha dec hu pareillamant emei, outro n'abbat ;
 Souet hon ous o goellet aman ho paseal,
 Rac ar c'hoad man so brudet da vean un doull fall.

— Doue, eme al laer-man ; a breserv pep hini :
 Me so aman o vale d'a neun disenoi,
 Hac e meus ma fljadur o c'hortos overnia ;
 Da larat ma breuvial na den d'am zroubla. »

O kerzet en e c'hever en deus interrojet
 Da c'houla belec'h e teue ha pelec'h oa bet,
 O voelet e voa ganti var e brec'h ur buguel,
 Hac en guisquet ar c'haera, casi evel eun zell,

Goude eun deus goulennet incontinant,
 Ha ne devoa bet netra evit avançamant,
 O quemeret ar buguel da zicour e soigni,
 Da denna ar virione, ma gallec, diganti.

Eus. emei, outro n'abbat, arc'hant a meus touchet
 Cant livre e meus recevet evit e guemeret,
 Nemert ma meus ar greden e collin ma bue,
 Quet mont emes ar c'hoat-man, an innoçant ha me.

— Na sonjet quet quement-se, emean, ma greg vad ;
 Me a vo d'ec'h compagnon da vont er mæs ar c'hoad :
 E zoc'h gant ar c'habiten, n'ho pezo droug ebet,
 Nem-rt ma renquet rentan ar pez o c'heus touchet. »

A zindan e soutanen e tennas nr zabren
 Hac e savas anezi ractal a us d'he fenn :
 Hac e c'houlenas ganti ar yalc'h pe ar vue,
 Ha laret dean pelec'h en deus laquet ane.

« Plasset ameus aneze enn dro d'ann-innoçant ;
 Goul'eo ganen ma bue evit aour hac arc'hant,
 Caët a ret aneze o tont d e zispaka,
 Ha lest ma bue ganen hac e hini gantan. »

Cregui a ra er buguel en ur memes instant,
 Evit dont d e zispakan da guemer an arc'hant,
 Dre permission Doue e tapas ar zabren,
 Ha gant eun tol, dre vonheur, en deus rannet e benn

Hep m en deus bet an amzer da guemer an arc'hant,
 E renqis mervel eno er plaç sub tamant.
 Hag ar vreg, hag ar buguel dre viraci zo rentet
 Voar an hent bras pareabl, ep m ho deus droug ebet,

Tri gendarm a erruas hac o deus goulennet,
 O veled ar goad diouti, petra oa arruet,
 Hac en deus ispliquet diraze pen-da-ben
 En devoa lazet ar mestr dimeus ar volerien.

« Dont a reet ganemp-ni, emeze, var o quis,
 Evit ma eifomp goelet ar mæc'ho viullantis. »
 Pa oue touillet an den-man, eo e armo cavet.
 Diou bistolen a daou den, eur sabreu, eur sifflet.

Pho devoa gret ho ingal hac ho procès-verbal,
 Unan demes ar gendarm a c'hoez enni ractal,
 Hac en em rentas pevar deus e gamarado
 Da vellet o c'habiten var a douar maro.

Pa veljout an abijo e fellas d'he tec'bel :
 Eu um ent a renquont pe deuan da vervel,
 Ha zezel o garroti hac ho c'has d'ar prison :
 En Par s e recevont ho c'hondaciation.

Lannion, Librairie alle C. U. HEMIN.